

(353)

Va flaneden zo caled ha va chans dinatur ;
 Me nemeus evit partach nemet displijadur ;
 Nemeus na car na mignon^{er}], siouas ! na mam na tad,
 Na christen, var an douar hag a garfe va mad.

M'emeus bet digant Doue caeroc'h evit chevans :
 Talanchou ar quir natur bepret d'ey em avans ;
 M'emeus - hint oll negliget, ambriaset amitie,
 Dilozet va oll studi, couet e captivite.

Ar bangou, ar c'hadoriou e scolach Landreg'er,
 A gri venjans em enep, pa na rian va dever ;
 Eno emañ va c'herent ha va oll mignonet,
 Eno em boa-me choazet ur vestrez coant meurbet.

(354)

Pa oan-me cloareq yaouanq, me oa joais ha gai,
 Ha siouas d'iy va-unan fragil e oay ive ;
 Mes aboue ma oay béleg em boa d'e renonet,
 Erruet ar fragilité c'hoas d'am c'hemeret.

Larantez, a zo hanvet amitie ar galon,
 Ne aller e gompari oc'h netra gant rezon,
 Nemet diou ar sirenen var ar mor o cana,
 A charm, pa deuer d'e c'hlêvet, bete'r re barfeta.

Me ameus bet ar malheur da veza arêtet
 Ur vech da glêvet unan e deus va deseret ;
 Sebhintout a rê g'entn, p'e c'hlêven o cana,
 Birvigen ne zfelije netra din er bed-ma.

Sesit, Sesit, va daolon, ha seullit a goste,
 Ma c'hallo va liou merqa serten gant quivione

Var ar paper ar regret ameus-me o fellât
 Diouz ar hini a garien hag a garien erfat.

(355)

Cupidon, mab da Venus, peg'en dibalamour
 Em rentes-te, maleiurus! Te zo bet un treitour,
 O prometi e vijen eurus hed va buez;
 Allas! toret ar rozen; ne chom nemet ar drez.

Ur vinien distag'et, eme un den ansien,
 Hag eus e vuirail couezet, ne ra fin birviden:
 Mar teuer de abandoni, e lang'is evelse,
 Mes o tout d'e repari, e toug froieuz adare.

Petra dal din, va mestrez, sonjal en em lagat
 Diouz murail ho carante, pa ranqan o quitât,
 Pa ranqan ho titezl hag oc'h abandoni?
 Consanti a ran brêmân son din an angoni.

Gent e velfac'h ar pesget o titezl ar mor,
 Erit ney dac'h, va mestrez, bigen eus va memor.
 Na c'halfec'h leñ em c'halon, c'hui velle imprimet
 Ar portret eus ho feson hag hoc'h hano scrivet.

(356)

Coll a ra va doulagad brêmân ar sclerijen,
 Defot n'ellont remergout sclerder ar stereden
 E deus grêt o delison epad qeit all amzer,
 Hag evit fin, d'o foanion n'o deus nemet mizer.

Adieu, tadou ha mamou, breudeur ha choarezet;
 Adieu, breudeur scolaerien, adieu, va mignonet;
 Me ya brêmân d'ur c'havarn, d'ar c'hoat da zereel ti,
 Eno gant al lapouset, me vezo dizoursi.

En dezerchou tevalla o veza ranfermet,
 Ne rin nemet medita beb heur ha beb moment,
 Var an objet e deveus captivet va c'halon,
 Hag am dalc'ho da james chadennet er prison.